

Kentañ geriadur

Eflamm ha

Riwanon



Yar



Morzhol



Kador

Embannet eo bet al levr-mañ gant skoazell :



- Skol Uhel ar Vro.

- Ministrerezh ar Sevenadur. Renerezh al levrioù hag al lennerezh.



AN HERE

Embannadurioù
evit ar re yaouank
17 hent Kerdrezeg
29000 KEMPER

Savet eo bet al levr-mañ gant :

Anna-Vari ROUS
Yann GWILHAMOT
Yann-Bêr TROUSSET
Marivon BERR
Martial MENARD

Trugarez a lavaromp da
Frañsez KERVELLA
Lukian KERGOAT
Turiaw MENTEG
Mark KERRAIN
Yann DESBORDES
ha skolaerien DIWAN.

Evit an evezhadennoù o deus bet ar vadelezh d'ober war al labour-mañ.

Skeudennoù gant Fañchoñ BOURGES.

Kentañ geriadur Eflamm ha Riwanon

Copyright AN HERE - Kemper 1984
Evit ar skrid. Evit ar skeudennoù AN HERE F. BOURGES.
Dfennet grols eo adkemer tra pe dra, ha pa ve ul lodenn hepken, diwar al
levr-mañ hep aotre an embanner. Pep gwir miret-strizh.


I.S.B.N. 2-86843-000-7

A a

A a

Abrant

Abrant ar furlukin zo livet e du.



A-us d'an daoulagad emañ an **divabrant**.



Aerborzh

O tibradañ diouzh an **aerborzh** emañ ar **c'harr-nij** melen.
O touarañ emañ an hini ruz.



Aerouant

Emañ an **aerouant** o c'hwezhañ tan dre e zivfron.
Loened spontus eo an **erevent**.



Akordeon

War un ton **akordeon** emañ an dud o tañsal.



Alarc'h

Emañ an daou **alarc'h** gwenn o neuñviñ war al lenn.
Sell pegen hir ha gwevn eo o gouzoug.
Laboused bras eo an **elerc'h**.

Alc'hwez

Lakaet e vez an **alc'hwez** er **potailh** evit prenañ pe dibrennañ an nor.



Setu un
troñsad alc'hweziou.

Amanenn

O tebriñ un tamm bara
amanenn emañ Eflamm.



Gant **dienn** al laezh e vez
graet **amanenn.**



Aod

Aet eo ar vugale da bourmen **war an aod**. Dirollet eo ar
mor ha gwallgaset e vez ar bigi.



Arar

A-raok hadañ e vez troet an douar gant un **arar**. Arat a vez
graet neuze.

Arc'hant



Un tammig **arc'hant** he deus bet Riwanon d'he c'halanna. O lakaet he deus en he fodig-espenn.

Armel

Nag a zizurzh zo e-barzh **armel** Eflamm ha Riwanon! Bern-war-vern emañ o dilhad enni.



Arouez



Un **arouez** glas zo war girri an ti-post evit ma vefent anavezet diouzh ar re all.

Hag anavezout a rez **arouezioù** all?

Askell



Emañ al labous gwenn o tispakañ **e zivaskell** evit nijal kuit. An hini melen zo bet gloazet un **askell** dezhañ gant ur chaseour.



Eskell ar c'harr zo peder anezho.


Askorn



O krignat un **askorn** emañ ar c'hi.

Korf an den zo dalc'het gant
e **eskern**.

Setu ur **c'horf-eskern**.



Aval



Un **aval** brav he deus bet Riwanon
d'he merenn-vihan.

Aval-douar

An **avaloù-douar** ne vez
gwelet nemet **ar c'horz**
anezho er parkeier.




Emañ Tad o **tibluskañ**
avaloù-douar evit fardañ
fritez.

Avank



Sell ouzh an **avank** : hir eo e lost, ledan ha divlev.
Petra emañ hemañ oc'h ober?

Avel




C'hwezhañ a ra kreñv
an **avel** ha plegañ a
ra ar gwez gantañ.

Azezañ

En he sav emañ Riwanon hag he foupinell
zo **azezet** war he c'hador vihan.



Azv



Glas eo an domatezenn
war an tu kleiz. Pa vo
deuet ruz brav evel eben
e vo **azv** ha mat da
zebriñ neuze.

B b * *B b*

Babig




O tenañ e vamm emañ ar **babig**.
P'en devo echuet **denañ** e vo lakaet
en e **gavell**.

Bag

O tont d'ar porzh
emañ ar **bigi-dre-lien**.
Ar vag-pesketa
zo erru dija.

Pet **bag** a welez ?



Balafenn



O nijellat a vleunienn da vleunienn emañ ar valafenn liesliv.
Balafenned all zo tro-dro dezhi.

Balum



Ar brasañ loen zo war
an douar eo ar **valum**.
Daoust m'emañ o vevañ er mor, ar **balumed** n'int ket
pesked.


Houmañ zo o strinkañ aezhenn-dour.

Bannañ



Eflamm en deus **bannet** e vell uhel-uhel en aer.

Baot



Emañ ar **vaot** vihan o tebriñ glazadur.
Er mor e vev **baoted** bras-meurbet.

Bara




O troc'hañ felpennoù
bara ledan emañ
Riwanon.

Boulc'het mat eo an dorzh vara.

Barr-livañ





Ur **barr-livañ** evit pep liv zo war
ar **marc'h-livañ**.



Bazh



(kanaouenn : Marzhin ar strobinieller)
- Yon Gouez -



Keit-ha-keit an eil eus eben emañ **bizhier**
ar skeul.



Biz



Ar **biz meud** e-barzh ar
bleud
Ar **biz yod** e-barzh ar pod
Ar **biz bras** eo lost ar
c'hazh
Biz ar bizoù a ro pokoù
D'ar **biz bihan** kouezhet
dindan.

Bleud

Ur wastell zo bet graet. O vont da renkañ
ar pakad **bleud** emañ Eflamm.



Petra a reer c'hoazh gant
bleud?

Blev

O kribañ he foupinell emañ plac'hig
he **blev rodellek**.



Sell ouzh an den-mañ :
n'eus **blevenn** ebet war e
benn; **moal** eo.


Boest

Ur bern
boestoù zo
war al leur :
ur voestad levrioù, **boestadoù** c'hoarielloù hag **ur voest**
c'houllo.



Botoù

Emañ ar vugale o wiskañ o **botoù** evit mont da c'hoari er-maez. Unan anezho en deus lakaet **ur votez** re vras evitañ. Piv eo ?



Boteier brav zo er stal-mañ.

Boutailh

Boutailhoù goullo zo war an daol. **Ar voutailhad** chug-frouezh zo bet evet gant ar vugale.



Bragoù

Sell pegen ledan eo **bragoù** ar furlukin ! Brikoloù roz en deus da zerc'hel e vragoù.




Bran

Pintet war skourr ar wezenn emañ ar **vran** zu. Emañ-hi o koagal da c'hervel **brini** all : kwag ! kwag !



Breizh



E **Breizh** emañ Eflamm ha Riwanon o vevañ. Tro Vreizh a raint e-pad o vakañsoù : Kemper, Brest, Sant-Brieg, Sant-Malo, Roazon, Naoned, An Oriant...

Brozh



Ur **vroz**h velen zo gant Riwanon hag unan c'hlas zo gant he c'heniterv Nolwenn.

Bugel



Ur **bugel** fur eo Eflamm; ar **vugale** all, int, n'int ket bet fur : torret o deus ur werenn war ar prenestr.

Buzhug

Ur **vuzhugenn** vrav
O pourmen dindan ar glav
A lavare d'ar maligorn
E oa bihan e zaou gorn.





Ar **buzhug** a blij dezho an douar gleb.

CH ch * Ch ch

Chadenn


Gant ur **chadenn** e vez taolet eor ar vag er mor.



Stag-ha-stag emañ **melloù** ar chadenn.

Chekenn

Paeet en deus Tad va marc'h-houarn gant ur **chekenn**.



C'H c'h * Ch ch

C'hoari

Emañ ar vugale o **c'hoari** war an traezh. Ur vag o deus savet.



C'hoarzhin

C'hoarzhin a ra Mamm o welet Eflamm gant tog e dad-kozh. Fentus eo!



C'hwec'h

C'hwec'h kanetenn zo e-barzh dorn Eflamm.



Ur c'hof tev en deus ar 6!

C'hwitell




Ur **c'hwitell** zo gant ar polis evit lakaat ar c'hirri da chom a-sav ha lezel ar vugale da dreuziñ an hent.

D d * D d

Dant

Eflamm en deus kollet un **dant**!

Da di an **dantour** ez a an dud p'o devez **droug-dent**.



Dent he deus ivez laonenn an heskenn.



Dañvad



Chalet eo ar **mesaer** gant e dropell **deñved** rak dianket eo an **dañvad** yaouankañ. Ret e vo dezhañ diwall ouzh ar bleiz!

Debriñ



Emañ Eflamm o **tebriñ** ur mell gwastell. Riwanon, hi, he deus bet unan vihanoc'h da **zebriñ**.

Dehou / Kleiz



Gant o dorn **dehou** e skriv tud zo ha gant o dorn **kleiz** e skriv lod all.

Gant pehini e skrivez-te?

Deiziadur



Bemdez e tenn Riwanon ur follenn diouzh he **deiziadur**

Pe zeiz emaoomp hiziv?

Delioù

Kouezhañ a ra an **delioù** diouzh ar gwez en dilost-hañv.



Ar wezenn-mañ ne chom mui nemet **un delienn** enni.

Dilhad




Setu **dilhad** Eflamm ha Riwanon :

- brageier,
- brozhioù,
- loereier,
- saeoù,
- boteier,
- chupennoù.

Diñs

C'hwec'h tal zo war an **diñsoù**.

Kemer un **diñs** ha sell outañ :
En tu all d'ar pemp emañ an daou,
En tu all d'ar pevar emañ an tri,
Petra zo en tu all d'ar c'hwec'h ?



Diskar



O tiskar an ti dirapar emaint. Unan nevez a vo savet goude.

Diwan



Had fav ha piz bihan o deus lakaet ar vugale war un tamm koton glebiet. O gwelet a reont **o tiwan** tamm-ha-tamm.

E e

E e

Ebeul

Koantik eo an **ebeul**. Chom a ra tost d'e vamm, ar gazeg c'hlas.



Erc'h



Emañ ar vugale o teurel **kouignoù-erc'h** an eil ouzh egile.

Er goañv an hini eo e kouezh an **erc'h**.

Eur

Dont a ra ar goukoug er-maez eus an **horolaj** da reiñ deomp da c'houzout **pet eur eo**.



Un **eurier** zo bet profet da Riwanon.



Evañ

Ur mell **banne** dour emañ Eflamm oc'h **evañ**.

Sec'hed-ruz en devoa.



F f * F f

Feunteun

Sin eo an dour a red diouzh ar **feunteun**.



Fleüt

O teskiñ **seniñ** gant ar **fleüt** emañ Riwanon.



Fourchettez

N'eo ket aes debrñ soubenn gant ur **fourchettez**!




Klask ez keriadur gant petra e tebrer soubenn.

Fri

Ur pennad sifern en deus tapet Eflamm. **C'hwezhañ** a ra e **fri** alies.



Frikorneg



Tourtañ a ra ar **frikorneg** kement tra a zisplij dezhañ.
En Afrika emañ ar **frikorneged** o vevañ. Loened gouez int.

Frouezh



A bep seurt **frouezh** a vez kavet da brenañ er marc'had :
sivi, per, orañjez, kerez...

Mat e vez kavet ur **frouezhenn** bennak da echuiñ gant ar
pred.

G g * G g

Gavr

Aet eo ar
c'havr da
laerezh kaol
e park an
amezeg.



Lemm-lemm eo kerniel ar **givri**... Diwallomp!

Genoù

Mouar en deus
debret Eflamm ha du
eo **e c'henoù** gant ar
chug anezho.



Geot

Uhel eo ar **geot**
emañ ar saout o
peuriñ.



Glas eo ar geot.



Ar pennduig zo
ur c'heotenn
gantañ en e bigos
evit aozañ e neizh.

Glav

Pa vez **glav**
oc'h ober eo
dav kaout un
disglavier pe
ur vantell-
c'hlav evit
mont er-maez.



Glazard



O tommheoliañ war ur maen emañ ar **glazard**. Ret eo d'ar
glazarded ruzañ, ken berr eo o favioù.

Glin



Emañ Eflamm war e **zaoulin** o
c'hoari gant e girri bihan.

Ui lamm he deus paket
Riwanon ha kignet eo bet
unan eus **he fennoù-glin**.



Gloan

Bep bloaz e vez **kreviet** an deñved evit kaout o **gloan**.



Stamm a vez graet gant ar gloan.

Goañv

Pa vez yen an amzer er **goañv** e ranker gwiskañ dilhad tomm.



Godell

Aet eo Eflamm da gistina ha leizh e **c'hodelloù** zo deuet gantañ d'ar gêr.



Goudor



Aet eo ar poñsined er **goudor** dindan divaskell ar vamm yar.

Gouelañ


Emañ ar babig o **ouelañ** en e gavell. **Daeroù** puilh a red war e zivjod kuilh.



Gouren

Oc'h ober ur c'hrogad gouren gant Tudual emañ Eflamm.

Gant piv ez ay ar maout ?



Gouriz



Emañ Eflamm o stardañ e c'houriz lèr rak un tammig re vras eo e vragoù dioutañ.


Gouzoug

Hir eo gouzoug ar gerc'heiz hag he favioù ivez.



Greun

O klask greun emañ ar golvan. Sell outañ o skrabañ hag o pigosat an douar.



Setu pemp greunenn gafe.

Grilh-mor / Legestr



Kalet-kenañ eo krogenn ar grilh-mor. Ken kalet all eo hini al legestr.

Al ligistri o deus meudoù bras.

Gwad

Troc'het he deus Riwanon
he biz ha **gwad** zo o
tiverañ diouzh ar **gouli**.



Gwastell

O fardañ **ur wastell** emañ
Riwanon. Petra emañ o lakaat
enni ?



Kavout a rez mat **gwestell** ?

Gwele

Kousket eo
Eflamm en
e wele.
Un dihuner zo
war e daol-wele.



Gwechall e kouske hon tud-kozh e-barzh **gweleoù-kloz**.

Gwenan

Emañ ar **gwenaner** war-dro e **ruskennoù**, ha **gwenan** forzh pegement zo o fraoñval tro-dro dezhañ.



Setu ur **wenanenn** o vleuniaoua.

Gwennili

C'hwibu he deus degaset ar **wennili** d'he floged.

He neizh, graet gant pri, zo dindan an noed.

En dilost-hañv ez a kuit ar **gwennilied** d'ar broioù tomm.



Gwer

Ur **werenn** c'houllo zo war an daol. Laezh en deus evet Eflamm enni.

Pelec'h e vez renket ar **gwer** pa vezont naet?



Gweuz



Livet ruz he deus Riwanon he **diweuz**.

Gwez

Setu ur **wezenn** : diskouez he c'hef, he **skourroù**, he **gwrizioù**.


Gwez faou, gwez derv, gwez kistin a vez gwelet er c'hoadoù.



Gwrizioù



Kemer ur skoultrig diwar ur blantenn
ha laka eñ en ur werennad dour :
a-benn un nebeud devezhioù e weli
gwrizioù o tont.



Setu ur wrizienn.

H h

H h

Hadañ

Gwechall e veze **hadet**
gant an dorn.



Bremañ e vez graet gant un **haderez**.

Harzlammer

Ul lamm diouzh e garr-nij ha setu an **harzlammer** o tiskenn buan en aer.




Digeriñ a ra e **harz-lamm** evel un disglavier !

Heol

Damguzhet eo an **heol** gant ur goulenn. Bremaik pa vo diguzhet, e teuy e **vannoù** da dommañ deomp en-dro.



Setu an heol o sevel.
Sav-heol eo. Pe liv eo an oabl ?



Heskenn

Diaes e vefe troc'hañ prenn gant ur gontell. Gant un **heskenn** an hini e vez graet.



Heuzoù



Pegen plijus eo bale er poullou pa vez bet glav ! Arabat ankounac'haat gwiskañ **heuzoù** avat.

Higenn

Ur peskig bihan en ul lenn
A welas ur vuzhugenn...
O ! Liposat merenn !
Diwall ! Peskig skañbenn,
Hounnezh zo ur **vouedenn**
Lakaet gant ur **pesketour**
ouzh e **higenn** !



Hiviz

Emañ Riwanon o
wiskañ he **hiviz** evit
mont da gousket.



Houad




An **houad** hag an **houadez** zo o neuñviñ e-touez ar
raoskl gant o **houidi** bihan ouzh o heul.

l i

J i

lilin



Toullet eo milginoù roched Eflamm. Gwelet a reer
e **zaouilin**.

E **ililin** kleiz zo un drouskenn warnañ.

Ivin

E penn ar **bizied** emañ an ivinoù.



Krabisañ e c'hoar en deus graet Eflamm gant e **ivinoù** hir.

Izel / Uhel

Re **izel** eo ar gador. Ranket he deus Riwanon lakaat div dorchenn warni. Bremañ n'eo ket re **uhel** an daol ken eviti.



J j

J j

Jirafenn

"N'eo ket ar goañv-mañ ez in da bourmen gant va skerb," eme ar **jirafenn** en ur vrochennat.



Jod

Droug-dent he deus
Riwanon, ruz ha
koeñvet eo he jod.



Redek re vuan o deus graet ar vugale : ruz eo o divjod.

K k

* K k

Kabell

Glav a ra : lakaet he deus
Riwanon **he c'habell** evit mont
da c'hoari er-maez.



Kador

Pignet eo Eflamm war ar **gador** evit
tapout ar voestad chokolad.



Kaier

Prenet he deus
Riwanon **ur c'haier**
evit pegañ warnañ
ar skeudennoù
loened emañ-hi
o tastum.



Karr

Ur **c'harr** zo dirak an ti. **Karr** tad Eflamm eo. O furchal
emañ ennañ.

Rankout a ra **ar c'hirri** chom a-sav pa vez ruz ar gouloù.



Kaol

"Mar debrez **kaol** ruz e vi ken kreñv
ha me", eme e dad da Eflamm en ur
aozañ **ur gaolenn** evit merenn.



Kastell

Emañ Eflamm ha Riwanon o
sevel **ur c'hastell** gant
diñsoù-koad.

Gwechall e oa **kestell** kreñv
dre ar vro.



Kazetenn



Resevet en deus Eflamm e gazetenn.

Ha koumanantet out-te d'ur gazetenn ?

Kazh



Flour eo blev **kazh** Riwanon, ar bidoc'hig eus torad kizhier bihan ar gazhez. Aet eo da rouzmouzat e korn an tan.

Keflusker



Emañ ar mekanikour o renkañ **keflusker** karr Tadig.

Kein

Kein-ouzh-kein eo bet lakaet ar vugale da c'houzout piv eo an hini brasañ anezho.



Kelien

✓ **Kelien** a-leizh a vez o nijal en-dro d'ar boued e-pad an hañv.



Setu ur **gelienn**, c'hwec'h pav he deus : amprevaned eo ar c'helien.



Kerez

Aet eo Mamm da gutuilh
ar **c'herez** diwar ar
wezenn a-raok ma 'z
afent holl e kof ar
mouilc'hi.



Riwanon he deus lakaet
div gerezenn ouzh pep
skouarn.

"Heñvel out ouzh ur **wezenn-gerez**," eme he breur dezhi
diwar c'hoap.

Keuneud



Ur **geuneudenn** dev zo o teviñ hag ur c'horadenn vat a
dan zo en oaled.

Gant **keuneud** an hini e vez graet **tan**.

Kloc'h


Er menezioù e vez staget
kleier ouzh gouzoug ar
saout. Ur **c'hloc'h** melen
zo ouzh gouzoug ar
vuoc'h-mañ.



Kof



Leun eo kof Eflamm : debret mat en deus.



(kanaouenn a Vro-Gembre)


Kontell



O staliañ an daol
emañ ar vugale.
Lakaet o deus warni
asiedoù, loaioù,
gwer, fourchetezoù
ha kontilli.
Ur gontell vras o
deus lakaet ivez evit
troc'hañ ar bara.

Korf

Noazh eo Eflamm ha
Riwanon. Gwelet a reer
o c'horf penn-da-benn.



Koroll

Bep bloaz da Ouel-Yann e vez
koroll en-dro d'an tantad.
Kozh ha yaouank a vez neuze
o tañsal.

Koumoul

Koumoul zo war an
oabl. A-raok pell e
vo glav.
Diouzh peseurt
koumoulenn e
kouezho ?



Kreion



Nag a dresadennoù kaer a c'hello Riwanon hag Eflamm ober gant **o c'hreionoù** nevez!

Kribañ



Fuilhet eo **blev** Eflamm :
poent eo dezhañ **o c'hribañ**.

Krogenn

Pa vez lakaet **ur grogenn**
stok ouzh ar skouarn e
klever ar mor o trouzal.



Troioù-gouzoug o deus graet ar vugale gant **ar c'hregin** o
deus dastumet war an aod.

LI

L l

Labous

Sell ouzh al **labous** o nijal a-denn-askell.

Unan all a weler o pigosat; gwelet mat a reer e lost, e zivaskell, e bigos.



Ur boc'hruzic eo hemañ.

Laezh



Ar saout a ro **laezh** deomp. **Goroet** e vezont div wech bemdez gant ur c'horoerez.

Na pegen mat eo ur banne laezh pa vez sec'hed!

Lagad

Riwanon zo glas-gwer he **daoulagad**.



Pa glask Eflamm serriñ ul **lagad**, ne c'hell ket, serriñ a ra an daou! Riwanon, hi, a zeu brav-tre a-benn d'en ober.

Len

O **len** o geriadur emañ
Eflamm ha Riwanon.
Kalz gerioù ha kalz
skeudennoù zo ennañ.



Leue

Halet eo
Bailhenn,
ar vuoc'h vrizh.
Emañ he **leue**
ouzh he denañ.
En o c'hraou e
vez dalc'het al
leueoù.



Levr



Kalz **levrioù** o deus Tad ha
Mamm en o **levraoueg**.

Liorzh



Aet eo Tad da draoñ al **liorzh**. O tennañ pour ha karotez
emañ. Riwanon, hi, zo deuet ganti sivi en he faner vihan
ha bokedoù evit Mamm.

Liv

Ur voestad pentur a bep
seurt **liv** en deus Eflamm :
glas, melen, gwer, ruz,
limestra...



Loa



Debriñ a ran va soubenn gant
ul loa vras ha va yaourt gant
ul loa vihan.


Loar

Ar bleiz kozh
'Pad an noz
A jilgamm
E droad kamm
Al loargann
'Barzh ar stank
A c'hoari
Patati.



Logod

Deuet ez eus **ul logodenn** da grignat an
tamm keuz a oa chomet war an daol.



E-leizh a **logod** zo er c'halatrez
hag alies e vez **Bisig o logota**
eno.

Louarn

Bet eo
Alanig al louarn
e klud ar
yer ha
kaset en
deus ur yar
wenn
gantañ.



Loened gwidreüs eo al **lern.**

Lunedoù



Aet eo fall daoulagad Mamm-gozh ha ne wel ket gwall
sklaer mui. **Lunedoù** a laka bremañ evit lenn.
Ifig ivez zo **ul lunedoù** gantañ.

M m * M m

Madig



Begoù lipous eo Eflamm ha Riwanon. Debrñ a reont kalz **madigoù** : karamel, regalis, chokolad...


Melc'hwed-krogennek

Emañ ar **velc'hwedenn-grogennek** o vont a-ruz war ar geot gleb.



Klask ez keriadur penaos e vez graet c'hoazh eus al loenig-se.

Melezour



Emañ ar c'hazh bihan o c'hoari dirak ar **melezour** : "Piv eo hemañ?" emezañ en ur glask pakañ e skeudenn.

Menez



Er **menezioù** emañ kenderv Eflamm o chom. Skiañ a c'hell ober er goañv pa vez ur gwiskad erc'h tev o c'holeiñ ar **menez**.

Merc'hodenn

Emañ Riwanon o c'hoari gant he merc'hodenn. Ur verc'hodenn a gomz an hini eo. Gouzout a oar lavaret hec'h anv : "Anna! Anna!"emezi.




Milin

An avel eo a laka bannoù ar vilin da dreiñ.



(kanaouenn)

Moc'h



Un torad moc'h bihan zo er c'hraou. Ur pemoc'h bras zo er c'hel e-kichen.

Moged

Pa vez graet tan en oaled...



e teu ar moged er-maez dre ar siminal.

Moger



Kouezhet eo **ar voger**
gozh en he froull.
Emañ ar vañsonerien
ouzh he sevel en-dro.

Mor

Gwallamzer zo
war vor ha
freuzañ a ra an
tarzhioù war ar
c'herreg.



Morzhol




Gant ur **morzhol** an
hini e vez sanket
tachoù er prenn.

N n * **N n**

Nadoz

Kalz **nadozioù** en deus ar
c'hemener evit **gwriat**.

Ur veskenn zo gantañ
en e viz ivez.



Naer



Dañjeraus eo an **naer-wiber**
abalamour d'he **binim**.

An **naer-vro**, hi, n'eo ket
binimus.

Ruzañ a ra an **naeron** :
n'o deus ket a bavioù.

Neizh




Laboused zo a ra o **neizh** war an dour ha re all a ra o hini war laez ar menezioù. An darn vuiañ a sav o hini er gwez.

Nozelenn

Un **nozelenn** zo diswriet war chupenn Eflamm.



O o



Oad

Pemp bloaz eo Riwanon. Koshoc'h egeti eo Eflamm : **c'hwec'h vloaz** eo. Pe **oad** out-te?




Oaled

En **oaled** ez eus un drezenn-bod evit lakaat ar chaodouron a-istribilh.



Oan




Menn an dañvadez eo an oan. Moutik e vez an ein da welet en-dro d'o mammoù.

Olifant



Er sirk e vez gwelet olifanted o tañsal, an eil krog e drompilh e lost egile.

P p



Pallenn

Riv he deus Riwanon :
kafunet eo dindan
pallennoù he gwele.



Paner

Frouezh zo er gwez. Aet eo ar vugale
d'o c'hutuilh, bep a baner ganto.



Paotr

Ar **paotr** bihanañ eus e glas eo Gurvan, met ken kreñv hag ar **baotred** all eo.



Pellgomz



Emañ Eflamm ha Riwanon o **pellgomz** d'o c'hendirvi evit mont da dremen o vakañsoù ganto.

Logelloù-pellgomz zo e kêr.



Penn

Lammet eo Eflamm e-barzh un toull don. Ne weler nemet e **benn**.



Pesk



Mat eo bet ar **pesketaerezh**. Deuet eo ar **besketourien** en aod gant ur **bern pesked**.

Pignat

Diaes eo
pignat gant
ar gordenn :
uhel eo !



Plac'h



Deuet ez eus **teir flac'h** da gerc'hat Riwanon evit mont d'ar poull-neuial.

Plu

Du eo **plu**
ar vran.



Gwenn eo
plu ar skrev.

Kavet he
deus Riwanon
ur bluenn
bet kollet
gant un
evn.



Pouezerez

Gant **ur bouezerez** e
vez **pouezet** an traoù
evit fardañ ur wastell.



Evit ober fars ez eus ezhomm : ul litrad laezh, un hanter lur vleud, un hanter lur sukr, c'hwec'h vi ha daou c'hant gramm prunev.

Prenestr

Skorn zo bet er
beure-mañ.
Emañ Eflamm o
tresañ gant e viz
war werenn ar
prenestr.



Pa vo deuet brav an amzer e vo digoret bras **prenestri** an ti.

Puñs



War vardell ar **puñs** emañ ar c'helorn. Dour zo e-barzh ar
puñs.

R r . R r

Ran

Ur **ran** zo war al loa-zour, war-nes lammat emañ-hi. Eben zo
lammet kuit.

Da serr-noz e vez klevet ar **raned** o c'hrakal.



Rastell

Troc'het eo bet geot ar c'hlazenn. Emañ Tad ouzh o dastum gant e **rastell**.



Kalz **restell** zo e lab ar binvioù.

Redek

Plijadur o deus ar vugale o **redek** war-lerc'h ar vell ruz.




Roñfl

Pegen tev eo kof ar **roñfl-mañ**! Emañ o tiroc'hal goude e bred fonnus.



Roued

Bec'h zo war ar besketourien o c'horren o **roued**, kement a besked zo enni.



S s

* S s

Sac'h

Seier-skol ar vugale zo renket en trepas. Ar **sac'h** glas eo hini Eflamm.



Sae

Ur bern **saeoù** zo er stal-dilhad. Ur **sae** c'hlas emañ ar vaouez o prenañ.



Sailh



Sailhoù bihan, pili ha restell zo gant ar vugale evit c'hoari war an traezh.

Peseurt anv a vez roet c'hoazh d'ar **sailh** ?


Sivi

Emañ Eflamm ha Riwanon oc'h ober un dartezenn gant ar **sivi** o deus dastumet. Ur pikol **sivienn** a vo lakaet en he c'hreiz.







Sizhun



1 Dilun dimeurzh dimerc'her
 4 Ha disadorn ha disul



2 A yaou 'ta, a yaou 'ta, a yaou 'ta, a yaou 'ta
 5 A yaou 'ta, a yaou 'ta, a yaou 'ta, a yaou 'ta



3 Dilun dimeurzh dimerc'her ha diriaou ha digwener
 6 Ha disadorn ha disul, setu echu ar sizhun.

Skeul



Ur **skeul** hir zo war
 sammgarr ar
 bomperien.

Skingomz / Skinwel



E-keit ha m'emañ
 Eflamm ha Riwanon
 o sellet ouzh ar film
 war ar **skinwel**...

emañ o zud o selaou un abadenn sonerezh er **skingomz**.



Skoaz



War e **skoaz** emañ e
vouc'hal gant ar
c'hoadour.

Gwintet eo bet Riwanon gant
he zad war e **zivskoaz**.



Skol




Skoliad eo Eflamm en
derez-kentañ ha **skoliadez**
eo Riwanon e **skol** ar re
vihan.

E-pad ar vakañsoù
e vez serr ar **skolioù**
hag ez a kuit ar **skolidi**
ac'hann d'an **distro-skol**.



Skouarn

Hir eo **divskouarn** ar c'had. Pe
loened anavezet ganit o deus
divskouarn ken hir all?



Derc'hel a ra Riwanon he zasenn
war-bouez he **skouarn**.

Skoulm



O **skoulmañ** lasoù he botoù
emañ Riwanon.
Ur **skoulm-krenn** he deus graet.

Skourr



Emañ ar voualc'h zu o
c'hwitellat war ar **skourr**.

Skubañ



O **skubañ** ar poultr
a-zindan ar gwele
emañ Tad.

Divin, divinadell...
Furch, furch, furch dre an ti
Degouezhet e toull an nor ne ya ket mui.
Petra eo? (Ar skubell!)

Sonerezh



Plijout a ra d'ar vugale selaou **sonerezh**.

Spilhoù

Ur **spilhenn** zo bet
lakaet war chupenn
Eflamm e-lec'h an
nozelenn en deus
kollet.

Implijet e vez **spilhoù**
gant ar gemenerien.



Stêr



Aet eo ar vugale da bourmen a-hed ar **stêr**. Lezet o deus ur vagig da vont gant **red an dour**.

Straed



Diouzh an noz e vez sklerijennet ar **straedoù** gant kleuzeurioù.

T t

T t

Taboulin



Nag a drouz a ra Eflamm gant **an daboulin** a zo bet profet dezhañ.

Tal

Roufennet eo **tal** Tad-kozh.



Telenn



Mamm Eflamm ha Riwanon a oar seniñ brav gant **he zelenn**.

Muioc'h a gerdin zo war **un delenn** eget war ur gitar.

Tenneris

Emichañs ne ray ket Bisig pilhoù gant an **tenneris**, ken lemm eo e skilfoù!



Teod

Droug zo e Riwanon : tennañ a ra **he zeod** d'he breur diwar he fulor.



Tokarn




Bep a dokarn zo gant paotred o marc'h-tan.

Tour-tan

En noz e vez gwelet gouloù an **tour-tan** o c'houlaoiñ ar mor.

Diskouez a ra o hent d'ar bigi ha d'al listri.



Touseg



Arabat ober droug d'an **tousegi** rak talvoudus int d'an den dre ma tebront kalz a amprevaned.
Pe loen a denn d'an **touseg**?

Traezh



O c'hoari en toull-**traezh** emañ ar vugale.
Petra a weler pelloc'h?

Tresañ



O **tresañ** he breur emañ Riwanon. **Un dreserez** dornet-mat eo.

Troad



Un taol **troad** en deus roet Eflamm d'e gamalad.



O vale diarc'hen emañ Riwanon. N'he deus ket lakaet botoù en he zreid.

U u * U u

Ufern

En ur lammat diwar ur vogerig en deus gweet Eflamm e **ufern**. Poan en deus.



Ret e vo dezhañ c'hoari troadig-kamm evit kerzhet.

V v * V v

Vi

Vioù fritet a vo da zebriñ.

Divin, divinadell...
Un ti bihan gwenn
N'en deus na dor na prenn.
Petra eo? (1st 2nd)



W w * W w

War

War an daol emañ Bisig.
Bremaik e lammo **diwarni** da
vont da lec'h all.



Y y

y y

Yar

"Kedik kedek!" eme ar yar a bouez he fenn, "Dozvet em eus ur brav a vi gwenn!"



O klask boued emañ ar yer. Diwallit buzbug!

Yezh

E brezhoneg eo bet savet ar geriadur-mañ. Ur yezh eo ar brezhoneg. Ar saozneg hag ar galleg zo yezhoù ivez.



Yod



Roet e vez yod da zebrñ d'ar wabiged.



O lipat he biz-yod emañ Riwanon. Perak?

Z z

Z z

Zoo



Er zoo e vez gwelet a bep seurt loened gouez.

Eürusoc'h e vefent en o frankiz eget a-dreñv barrinier
o c'haouedoù.

Moulet ez eus bet
4.000 skouerenn
eus al levr-mañ

Echuet moulañ e
miz Meurzh 1984.
Moulerzh ar martolod
ar Gelveneg

Diskleriet hervez lezenn
Eil trimiziad 1984.

Nnn ar mouler :76 A 295



AN HERE

Embannadurioù
evit ar re yaouank
17 hent Kerdrezeg
29000 KEMPER

I.S.B.N. 2-86843-000-7

F 60,00

LA

60,00 L.